


— 141 —

ER BUGUL


AR MESAER



1) Peb mi - tin, hân ha gouï - an, peb mi - tin, hân ha gouï - an, D'er
Bep mi - tin, hanv ha go - anv, bep mi - tin, hanv ha go - anv, D'al



lann get me lon - net e han, ho! Hag e - pad en dé me gan, D'er
lann gant va loe - ned ez an, Ho! hag e - pad an de me gan, D'al



lann get me lon - ned é han, ho! Hag e - pad en de me gan.
lann gant va loe - ned ez an, ho! Hag e - pad an deiz me gan.

2

2

Rag me son hag e gan mat,
ha me far aveit huitellat
N'er haver ket er hornad.

Rak me zon hag a gan mat,
ha va far evit c'houitellat,
N'er c'haver ket er c'hornad.

3

3

Allas! ur hannour neué
Arruet ér lann vras un dé
E huitel guel eit on mé.

Allas! eur c'haner neve,
erruet el lann vras eun de,
A c'houitell gwel' gedon-me.

4

4

Lies em es ean kleuet,
Ha bet en dé e vou reuet
Sonnein mui ne gredein ket.

Alies 'm eus her c'hevet,
A-hed an noz e kan bepred,
kana ken ne gredin ket

5

5

En estig-noz en hanuer.
Rag d'anderù hembkin é kleuer.
'E sol er hoed é voeh sklér.

An eostig-noz hen hanver,
rak en noz hepken e klever,
e kreiz ar c'hood e vouez skler

6

6

En éned ag er harter
E chèr ou beg a p'er hleuer
E kannein étal er gér.

Holl evned all ar c'harter,
a zerr o beg dal m'her c'hever,
o kana e tal ar ger.

— 142 —

7

Hag er chonj e zou deit d'ein.
De vontet d'er foér de brennen
ur flaouit eit er bamein

8

Lies, kenteh el en dé.
Saüet em ès a men gulé.
Eit mont d'er foer de valé.

9

Eit monet de varhatad.
D'er foerieu vras ag er hornad
Ur flaouit eit flaouitat.

10

Allas n'em ès chet kavet,
Betag breman, é foer erbet
Er flaouit em ès klasket.

11

Ha chetu perak, pautred.
Tré ma vou un estig ér bed
Huitellat ne gredein ket.

7

Sonj a zo deut d'in eta,
da vonet d'ar foar da brena,
eur fleüt d'her strobinella.

8

Aliës da c'houlou-de,
oun bet savet eus va gwele,
'vit mont d'ar foar da vale.

9

Vit monet da vare'hataat,
d'ar foariou bras eus ar c'hornad,
eur fleüt hep par da fleütet.

10

Allas! n'em eus ket kavet,
beteck vreman e foar ebet,
ar fleüt kaer am eus klasket.

11

Ha setu perak, paotred,
Tra ma vo eun eostig er bed,
c'houtellat ne gredin ket.

J. LE BAYON.

